

# KANTIK

## DA ZANT JAKEZ

---

### DISKAN

*Zant Jakez, tad Ilis Perros,  
Gret ma c'helfomp 'vel hon zud koz,  
Karet Doue, c'heuil he lezen,  
Hen meuli enn Env da viken.*

#### I

Zant Jakez, deuz ar Galile,  
A oa map hena Zebede,  
He van, eur plac'h deuz ar furra,  
Oa nizez da Zantez Anna.

#### II

He dad, hag hen, hag he vreur Iann,  
Bemde, gand eur vaguik vian,  
War vor, c'honee ho bara,  
'Vel tud ar vro, o pesketa.

#### III

Eun dervez, goude ar mare,  
Ho zri, n'ho bag, enn n'ho c'hoaze,  
'C'hrouie ho roejou dispennet  
Gand ol ar mor hag ar pesket.

#### IV

D'ar c'houlz-ze, gand he vam chome,  
Micherour ha paour evelte,  
Enn Nazareth, enn n'ho c'hichen,  
Zalver ar bed, Doue ha den.

#### V

Klask a re neuze ebestel,  
Evit prezeg he Aviel :  
'N eun tol n'em gavaz diraz'he,  
Enn dro d'erhan, Per hag Andre.

#### VI

Ann daou-man oa amezeien  
Da Zebede ha d'he vibien,  
Pesketerien deuz ho micher,  
Breman ebestel hon Zalver.

#### VII

« Jakez ha Iann, eme Jezuz,  
« Zellit ouzin, ha bet nerzuz ;  
« Deut war ma lerc'h, hag eun dervez,  
« E po lod em rouantelez !

#### VIII

« P'euz gret biskoaz, beteg aman,  
« 'Met tapout pesket er vro-man ;  
« Deut war ma lerc'h, ha m'ho tisko  
« Da besketa tud a beb bro. »

#### IX

Dindan zell Jezuz e krogaz  
Enn ho c'halon eun tan ken braz,  
Ma lezhont, vit c'heuil he roujou,  
Ho zad, ho bag hag ho roejou.

#### X

Pa oa pignet enn Env Jezuz,  
Zant Jakez, gand nerz burzuduz,  
Da genta brezegaz ar Fe,  
Enn Samari hag enn Jude.

#### XI

Mont eure goude war eul lestr,  
Da vro ar Spagn ; eno d'he vestr  
C'honeaz kalz a ineo,  
Arog distrei, are, d'he vro.

#### XII

Roue fall ar vro, Herodez,  
A lakaz tapout zant Jakez,  
Pec'hini ganthan oa barnet,  
Dustu da veza dibennet.

#### XIII

En Spagn, er guer ar Gambostel,  
E man breman he gorf zantel ;  
N'euz ket eul lec'h muioc'h brudet  
Er bed, na mui darempredet.

XIV

C'houi p'ez disket d'hon zado koz,  
Zant Jakez, hent ar baradoz,  
Karet Doue hag ar Werc'hez,  
Ren ho bue er zantelez.

XV

Arok, 'vel denved diberc'hen,  
'Vewent hep fe ha hep lezen,  
Ar c'hrenva, c'hennez oa roue,  
Den na re van deuz he ine.

XVI

Nag a rum tud deuz a Berroz.  
Zo tremenet n'oc'h iliz koz !  
Aboe noa c'hant vloaz m'e zavet.  
Nag a dud enhi n'ez pedet !

XVII

Aman, dustu ma oan ganet  
War brec'h ma faeron oan douget  
An dour a rullias war ma fenn  
Da Zoue oan evit biken.

XVIII

Eun toullad blavejo goude,  
Deuz an dol zakr, gant eur gwir fe,  
Ec'hon bet deut da zaoulina,  
Ober e rent ma fask kenta.

XIX

Bet on ziouaz aboe neuze,  
Gwel didruez deuz ma iue ;  
Dre c'hras Doue on distroet,  
Evit biken, deuz ar pec'het.

XX

Reit d'in skoazel, c'houi zo ma zad,  
Dalc'het ho puguel enn hent mad,  
Ma rin plijadur da Zoue,  
Ha d'ech ô salwi ma ine !

XXI

D'hon zud a vor, reit ho pennoz,  
Ho diwallet ha de ha noz,  
C'houi war ma ge rust ho micher,  
Rak evelte 'ouac'h pesketer !

XXII

E maint war vor, dre bep amzer,  
Hag ho gonid a zo dister,  
Ha kouskoude neuz nemert'he  
Da rei bara d'ho bugale.

XXIII

Reit ho pennoz war ho foaniou,  
Gret ma c'hei pesket er roejou,  
Kristenien vad int, zant Jakez,  
Ha n'eont gwech d'ar zul er maez.

XXIV

D'al labourer a lak evez  
Da ren ervad e diegez  
Ha ro skouer vad d'e vugale  
Zo mad d'ar paour, d'an dud entre.

XXV

Reit ho pennoz d'ean, d'e dud,  
D'e vugale, d'e loened mud,  
Ma vo stad ennan pa welo  
Ed stank ha mad en e barko.

XXVI

Kaer a neuz kat arc'hant hag aour,  
Eun den hep fe zo eun den paour ;  
Doujans ha karante Doue  
Eo pinvidigez an ine.

XXVII

Miret hon farous didamal,  
Miret ar fe a n'ez gwech-all  
Dalc'het en hent mad hon zado,  
Digoret d'he dor ann Envo.

XXVIII

Aman, Zant Jakez, pa varwin,  
'Rok diskenn em be e teuin.  
Neuze c'houi bedo ma barner  
Da gad true ouz ar pec'her.

XXIX

Gret va vefomp holl, Zant Jakez,  
Bodet enn dro d'ec'h eun dervez,  
Dirak Doue, gand hon zud koz,  
Evuruz holl er baradoz

IMPRIMATUR :

Perros-Guirec, die 7<sup>a</sup> Julii 1901.

LE PROVOST,  
*vic. gen.*

